

CHANSONIO

COMPOZET

GANT Y.-M. THOMAS

Deus Camlez




Prix : 25 c.



LANNION

IMPRIMERIE VEUVE LE GOFFIC, LIBRAIRE

—
1870





KONTANT HON DEUZ MA LOD

KINIGET

Da Yan D'Arc'hant a da J.-B. Hernot

War ann tòn gallek : *Quand j'étais jeune fille.*

— — — — —
Anfin, chetu ma fortret
War eur levrik imprimet ;
Peguement hon kontant
Pa-z eo gwir eo dissinet
Gand eun artist distenget,
O ia, gand Yan D'Arc'hant.
A ha, ha, ha, ia da,
O ia, gand Yan d'Arc'hant.

Gand e grañon dilied
A zoublœur a he vizied,
E ra enor d'hon bro ;
Dre buissans e spered
Dre holl eo aneveed.
Enor d'he vurzudo !
A ha, ha, ha, ia da,
Enor d'he vurzudo !

A ma bust original
A zo war ma chiminal,
Trei mad e ra ar rod,
Ma fen kelt, kazi 'vel moal,
A lagad lem, barw a tal ;
Kontant hon deuz ma lod.
A ha, ha, ha, ia da,
Kontant on deuz ma lod.

Eun artist muan kared,
Hernot mab, deuz Plouaret,
Gand he wir spatulen
Penneged a diswoared,

On nano neuz amared,
Pa rend padus ma fen.
A ha, ha, ha, ia da,
Pa rend padus ma fen.

Krañon Breiz a spatulen
Me a harp gand ma fluen
A galon, a ine,
Ar sans pur enn gourc'hemen
Wit bro enn eur dremen
Blasonomb all lore.
A ha, ha, ha, ia da,
Blasonomb all lore.

AR PICHAGLAUGIK

War ann tòn gallek : *Venez, ô! mes compagnes,
Venez, voici mon plus beau jour.*

Kan gai ma fichaglaugik
Dibreder pennik du
A zeder 'vel ann estik
Repet da kik a uu,
A neur lampat war ar bar
Kan melodi d'ez par
Zo ziwillik 'barz er gleuzen
A tommik war e hu.

DISKAN : A, ha, ha, ha ; a, ha, ha, ha,
A, ha, ha, ha ; a, ha, ha, ha.

N'eur gannan e c'hoeffuren,
Velse lere Polin,
E ficher enn e c'hichen,
Daoulinet war ar min,
Ac e humaj virginal
E ruzelen gristal,
Koantoc'h wit neur mizilour
Umaj eur cherubin.

DISKAN.

Me meuz assinasion,
A lere doustadik,
O! da voned d'ar pardon
Disul gand Erwanik,
Da vond on daou assamblez
Da bidi ar Werc'hez,
Mesk ar roz, enn e chapel,
War e brec'h e Mabik.

DISKAN.

A goude fin an ofis,
Pur a divin Gwerc'hez,
E c'hefomb en honnestis,
Da di ma merronez
Da droka a wir galon
Lod dimeuz ar pardon,
Ar graouen alamandes
Wit he c'hrampoen winis.


DISKAN.

D'ar braden c'hefomp goude
Da ober eur bouket
Gant bokejou aotrone
A re dimezelet,
Ewit kas d'am mammik koz
Eun tam arog ann noz,
A hi me da chirissan
Gand ma muan kared.

DISKAN.

Konversi na garan ket,
Ze zellau vel impur
Na pourmen 'barz er verret,
Ar c'hiz-ze ne ket fur,
Doussoc'h e ve d'am c'halon,
Goude fin ar zarmon
Assamblez gand Erwoanik
Dansal war ar glazur.

DISKAN.



GWERZ KONTEZ TONKEDEK

Ewit esad dousad ar rimo brezonek

Kazi war dôn *Maner ar Fawet*

Mar get c'houi d'ar brezel,
Mar get d'ar Palestin,
Lest ganimp n'ho kastel
O pried Idolin,
Gand ma diou dimezel
E vredo ar zatin.

A boan ai partied
Ar c'hont e mez e di,
Allaz wit e bried !
Koe marc'h ar jalouzi :
Da vessan ann deved
E kesont anezi.

Mesk bokejo burlu
E lann hi gompoze
Gwerjou leun a vertu
Wit kana da Doue,
Ma retornje dustu
E idol Milibe.

Tont deuz ar Palestin,
Eun de teu da dremen,
Eur serten pelerin
Gwernisset a gregenn
Kemer moez Idolin
Wit eur vandolinen

C'houi a gan re joäus
Da berc'hen o c'hastel,
O ! kanet trueus,
Maro he boe zo pel,

Mès maro gloriuz,
Ac enn kristen fidel.

Eun devez, pell goude,
Tarnije ar c'houlmed,
A tossen Menebre,
Wa dija malhenet ;
Hi gane da Doue
Ken kontant e devet.

Vel eun drompill bruillant,
'Chouri eur c'hoursier ;
Vel eun astr eklatant
E vrill eur bouklier
'Chang enn mizilour koant
Kristal pur ar rivier.

Aret pac'hik joaüz,
Mès aretomp aman,
Eur voez melodiuz
Barz e lan a glewan ;
O ! Redemptor Jezuz,
Perfidi a zantan.

Kerkent ar c'havalier,
Bleg e vizieren,
A lamp dreist ar skalier
Evel eul luc'heden,
Ac enn umbl chevalier,
'Zalud ar verjeren.

Zalud d'ec'h, berjeren,
A d'ho moez truezuz ;
Mil iskuz n'eur dremen,
Mar c'hon ken kiriuz :
Wit piou ai o peden
Trist a melodiuz.

Aotro, c'houi 'goel velen,
Toled mesk ar guerrec,
Heb brec'h wit ma difen,
O vessa neur lannek :
Me ar chatilinen
A gastel Tonkedek.


Mar goc'h chatilinen,
Kleed kad eur pried
Puissant d'ho tifen ;
Enn gras n'eum espliket,
Piou o tiles vellen ?
Eun de vo miliget.

Na vo ket miliget,
Moderet o komzou,
Wit ar Groaz viniget
Kemerás ann armou,
Mesk ar Zarasined
E treñ he relegou.

Ma fried Idolin,
Ma idol dous a pur,
O ! deuz war ma feutrin,
Re leun eo ar muzur,
Kent wit arc'hoaz vintin,
Me walc'ho an injur.

Kerkent he a dennas
Gad e dorn puissant,
E lamnen fin damas,
Deuz e foureo brillant,
Malheur 'ta veag c'hoaz,
Red vo bea tirant.

O ! klenket o kleve,
Kont, arretet ho lans,
Lezomp en dorn Doue
Ar c'hivac, ar potans,
Malheur d'he vugale
Gred touc'h euz e valans.



MA C'HINIAD D'AM MESTREZ

War eunn tòn valz, enn gallek: *Maman me dit que fillette*
[à mon âge, etc.]

Me zo eun den iaouank a rejouisans,
A zo ganet en kichen eunn iliz,
Ac a zo ma spered orubl enn balans,
Allaz ! o sonjal barz em iaouankiz ;
Brizet ma c'halonik gand ann amitie
Enn amzer-man pehini hom-ni prezant,
Ma fidelite na n'he evid'hon-me
Nemed eur zujet kruel a dourmant.

Desadorn d'ha noz, allaz ! strist ha skuiz,
Evel ma m'oa achuet ma zunwes,
War skalier ar vered ma unan c'hazeiz,
Da zoujal seriuz em gwir vestres
E lec'h pelec'h welen-me e demerans
Pehini e oa a damdost d'am hini,
Heb kavet ar galloud enn assurans,
Allas ! da antren wid e zaludi.

N'eur drei ma lagad war ann templ zantel,
Me a ra ar zemand, a wir galon,
Da renons a grenn d'am mestrez re fidel,
A da chanj net a disposision,
Da renons dustu d'eur sor ken malurus
D'he dilezel ha da gwitad ma bro
Ewit ivita ann amour ken trompluz
A renons net a grenn d'he oll bompo.

Mès c'hoaz, ken ewit kwitad, e tistroa,
Da lansa eur zel trist war gad e zi,
Zur ben ann deiz-ma-pensun d'ar c'houlman
Me a vo ouспен kant leo diouti ;
Adieu eta, ma mestrez mua kared,
Me a renk breman dont d'ez tilezel,
Rag ma faspor a ma livre zo zined
Ewit partian da goste Bourdel.

'Noz a henwaz e klees-te c'hureal
Dre umanite em humbl personaj,
Marteze biken da lagad leal
Na divalwen em prezans davantaj ;
Te na zonjez ket ma da vuan karet
Dindan ar skeud dimeuz eunn ivinen,
Euz sklerigen al loar ag ar stered,
O kompozi dimp-ni eur ganaouen.

Te zo disidet, gwir eo, da dimezi,
Fos avantajo zo deut d'ez temti,
Da wel blaneden ne ra met ogmanti,
Labour e spo, ma dous, da hivourdi ;
Me ez sped enn gras n'ez pedenno fervant
Da c'houlen euz Doue boneur ha chans,
D'ann hini teuz koustet kement a dourmant,
Pehini a barti war he dour-da-Frans.

ITENERER AN TOUR DA FRANS

War don : *Zalud da Freiz-Isel.*

Han da gwitad Treguer,
Ma mestrez, ma ligne,
Ma mamm ken familler,
A leun a garante,
E c'han da vale bro,
D'ober ma zour da Frans,
Adieu 'ta, ken a vo,
D'an oll bonheur, chans.

DISKAN :

A, ha, ha, ha,
A, ham, pa, ham, pa, ha.
Demeuz a Zant-Briek
A c'his-me da Raon,
A gant ma brezonek,
Da Nanvet, da Vourbon,
Hag o poursuivr ma sor,
O tremen ar Rochel,

O tremen dre Rochefort,
Angoulem a Bourdel.

A, ha, etc.

Gweled meuz er ger-man
Eur pont hardi meurbet,
Eun theatr ar c'haeran,
Zo braz a distinget ;
Ar gwin hag ar merc'hed
A zo temptus eno,
Piou deu d'ho re gared
Rafe wel chom n'e vro.

A, ha, etc.

Eun de deuz ar mintin,
Kontant evel eun oan,
Kemeris rout Agin
Wit mond da Vontoban,

Gand eun dizir jalouz
Da guntul talancho,
Me dremen en Toulous
O pellad deuz ma bro.
A ha, etc.

Kiriuz gand rezon,
Douget wit ma micher,
Me dremen Carcasson
Wit mont da Vompiller
E lec'h ma m'euz gweled
Feuntun vras ar Pero,
Eur skol veudeusined
E reng huella zo.
A, ha, etc.

A da Nim ac'hane,
Goude c'hon diskennet
E lec'h ma habite
Gwechal ar Romaned ;
Labourio ansien
A weler er ger-man,
Eveld'hon n'eur dremen
Bed soign d'ho bizitan.
A, ha, etc.

Zellet ann Arene
Lec'h ma c'her da c'houren,
Ac an tour Mang eno,
Uel war ann dossen ;
A templ a Diane, z,
Ann Ti-Care ouspen
Zo groet gant eun adres
Imposubl da gompren.
A, ha, etc.

Da Varseil ac'hane,
Partiis prontamant,
Eur ger gaer er c'hreste
Pinvik a konversant ;
A da welet Toulon
Gant e merdaïdi
Ac e for Faraon,
A rad ac e listri.
A, ha, etc.

C'hane hon partied,
Da vizitan gand joa

Lec'h ma c'he chomed,
Espaz a dregont vla,
Ar Vadelen fidel
Goude marw ar Messi,
N'he c'hroten n'eur roc'he
N'eun deserd disabri.
A, ha, etc.

Tost d'he c'humaj zantel
Umblamant me daoulin,
Kontant evel eun el,
Boneur pur a divin,
Da bidi 'r Brovidans
D'am return c'hoaz d'am bro
Wit rentan asistans
D'am mamm bete maro.
A, ha, etc.

Diwar lein ar roc'hel
Hanvet ar Zant-Pilon,
Dre n'er me lans euz zel
En trezek ma c'hanton :
C'houez ar gleure'h war ann
Doue mui d'am zentin, [tan
Rag merc'het Perwenan
Wa tric'hant leo diouzin.
A, ha, etc.

Mès ewit tostatai,
Me dro war ma zalon,
Joatùs, kontant a gai,
Dre Aix da Avignon
E lec'h ma meuz goelet
Pales ho Tad-Santel,
Eur pont coz ha flaufet,
War he greiz eur chapel.
A, ha, etc.

Adieu pinvik Provans,
Adieu ker Avignon,
Me dremen dre Valans,
Salud Lion-sur-Rhon,
Ma zal deu da virwin
O c'hantren n'ez murio,
En gras part'aj ganin
Da gerran talancho
A, ha, etc.

Er ger-man n'euz brillet
Fleuren ma iaouankis,
Mesk ann ibinistet,
Daou vloaz en nonistis
Ma c'hompaz, ma kizel
A newa renk ha poez
Wit enor Breiz-Izel,
Enor da vourk Camlez.

A, ha, etc.

War vlincho houarn moan,
Meuz gwelet tost eno,
Eun dilijans dre dan
Zo frommus tro-a-zro,
Eun deiz, me gar kridi,
Salud a penneauded
A rei dimp beaji
Evel gweneried.

A, ha, etc.

Adieu Lion-sur-Rhon,
Poent eo din zonzal par...
Partia da Vakon,
Adieu ta bro Jakar ;
Da Dijon, da Auxer,
Da Troy, Melun eb keun,
Lutes, ma c'hoz komer,
Man *celtic* war da gleun.

A, ha, etc.

Chetu me en Paris,
Babilon dous a kri,
O tibitan em giz
Ar c'hoad, ann inizi ;
A tregont artizan
E meuz da dirijan,
Me warbenn a dindan,
N'hon gav e renk kentan.

A, ha, etc.

O tremen ker ar Roc'h,
Ma c'hollier dibrenned,
Ma fakat em sac'h broc'h,
Gallek na wien ket :
Demp da glask ann talant
Re bel ra en gortoz,
Partout zo merc'het koant
A dreinet mesk ar roz.

A, ha, etc.

M'ho c'hali iaouankiz
A kered ma c'hredi,
Ned ket env da Paris
Da glask n'eun instrui,
Rag en pad ho bue
Reon ar memes tra,
Diroutinet eun de
C'hint zotoc'h wit ar wa.

A, ha, etc.


Adieu kabital Frans,
Dees koant ha traïtour,
Dre Chart ac Orleans,
A dre Vloj c'han da Dour,
Dre Man, Ange, Poitie,
Me retorn d'ar Charent,
Fidel d'am Fromese,
Ma mestrez zo kontant.

A, ha, etc.

Done, Tad Eternel,
En gras diwar o tron
Degnet disken eur zel
War ma umbl union,
Ag en pad ma bue
Zouten nec'h o bugel,
Wit kas eun tam lore
D'he vamm on Breiz-Izel.

A, ha, ha, ha,

A, ham, pa, ham, pa, ha.



CAMLEZ CHIRI

War ann tòn gallek : *Quand viendra la barque, etc.*

Ia da, me a gar ma Breiz-Izel
Barz em c'halon ag em ine,
A dezi zur me vezo fidel
Bete disken e dor ma be,
Na deui reabred falc'h ann anko
Da forsi ma goad da ienan,
Hi a disko just dre ma chanson,
Pel diouti, pel diouti,
Em c'hreiz he bidolan.

Eun desir ardant da n'em instrui,
Deu en iaouank d'am animan
Em disidas pront da n'eum separi
Demeuz a vord ann Ocean
Mès mar c'hon stinket mesk ar C'halltoet,
Gant nerz ma destinasion,
Me a viro ewit ar Celtoet,
Eun ide dous, eun ide dous,
Pur sinser a gwirion.

A m'ar c'he privet deuz ma zalancho
Ar barouz charmant a Gamlez,
Me a gano gai e melodio,
Gant justis herwe ma moez,
Rag parouz evelti na n'euz hini,
Gravet don e c'he em ine,
A me deu gant justis d'he c'hadori,
Kar en ne bourg, kar en ne bourg
E resevis ann de.

Enni gwejal n'eun blije ann oblans :
Dindan e diseol atraiant,
Enni ii choase o demerans,
N'he zrogenno ken ravissant
Kar en bord he ruzelenno kristal,
E weler c'hoaz rest o blazon ;

Ia, hi a hai ma c'her gabital
E traso tan, e traso tan,
Graved ai em c'halon.

Pa deu dime zonzal en milin
Zo hanwed milin Rudono,
Eunn electricite dous a divin
A dom ma goad em goazio,
Ken kontant e he neuze ma spered
Zur on e c'hasten ma bue,
Ken a jong dime e hon douged
Er guir bales, er guir bales
Demeuz ann Elize.

Jong mad e meuz demeuz e miliner
Pehini a neva diskamant
Ar pez a oa, ziwas! zur em amzer,
Re rar n'omp bro certainamant ;
Bemdez ni a rede ge d'he vilin,
Nimb bugalidio diwar dro,
Ewit diskin erfad lenn a latin
Da gad eur levr, da gad eur levr
Da vond d'ann ofiso.


Me, elec'h studian ma A B C,
E vije kad, tost d'ann tourant,
Gleb, o admirant e rapidite,
E boez, e droïo vigilant,
Ac o kontempli nerz ann elemant
Ken puissant d'hen komandin,
Me zante evel eur c'hlawen ardant,
A dous a pur, a dous a pur,
O tont d'am anflammin.

Pa deue n'aransono da drokan,
Ar strakeres da rezonin,
E teue ma zal iaouank da fronsan,
Ma intelijans da virwin,
Neuze e ankoueen ma skritur
A ma bara du em paner,
Dre ma wan-me choazet gand ann natur
Da dond eun de, da dond enn de
ekanisianer.

Ma tremenfac'h herie dre ma uzin,
Tost d'Angoulem, war ar Charant,
Ma welfac'h eno ma rojo potin,
Lanset frommus enn mouamant,
Zur, hi a deuffe d'ho electrizan
Dre ho vigilans hag ho foez
A ganin c'houi deufe da ganan :
Gloar ag enor, gloar ag enor
D'ar barous a Gamlez.

MA RUDONO CHIRI

War den : *Ann Normandi.*



Azeet enn peuc'h war ar glazur,
Tostik da vilin Rudono,
Me a admire charmo ann natur
Dindan bris-heol ann deillo fo ;
Ar moëjo dous deuz a lapouset
Tro-zro em rejouisse,
O kanan d'eun ton deliberet
Ar charmo pur deuz ar saison newe.
Eno ma imaginasion
E oa presis, lem ha dispoz ;
Me gred din ter Muz ag Apollon
Em ruskelle n'eur c'hawel roz,
N'eur brodigan sklerder d'am speret,
Taland a galloud da riman,
Wit kanan 'sambles gand ann evned,
Ma Breiz-Izel, ma bro eo a garan.
Tostik d'in klewen eur ruzelen
O heoneni e dour skler
N'eur strinkan perl warann deillio raden.
Hi rede, gand hast. er rivier ;
Ann hec'hoeder, dre he vek mignon,
Gras d'he askel vigiland,
He da annons charmo ma c'hanton
Betek ar wel demeuz ar firmamand.

Pelloc'h eur voualc'h, dre e huiban,
Perchet huel war eur brank zec'h,
A re d'ar grennardet Koadelan
War ar skalier posin o bec'h,
Stourman ouz blinchou a lann pitiant
A lerrez d'an evn e pemb u
Da gas d'ho mamm gand kontantamant
Da alumenni o grampoen ed-du.

Ann durzunelik o c'hirvoudin
N'eum astennet war e hez skler
N'eur c'hervel e far d'he c'honsolin;
Didarse ma zalik zeder
Ar vilenezek o vessa
E c'hunan enn parc ar rivier,
E moezik dous ag e femzek vla,
A gurune charmo n'ewe amzer.

Seiz kloc'h Landreguer o vouboal
A bike ma intansion
N'eur lansan a dour ar gathedral
Ar vajeste deuz o bourdon,
Ag explosiono perriero,
N'eur lansan o bond betek n'er,
Anonse d'am brois, tro-a-zro,
Ann eil dewes demeuz a foar Dreguer.
Warc'hoaz e redont d'ar zul guentan,
Tommed gand gwir devosion,
Gand dezir ardant da asistan
Assembles er prosession;
Man prest tapajo, baladined
O c'hoezan en no chalumo,
Reio d'am brois pellerined
Ankoad sarmon *Tantum* a seiz acto.

MA FIDELITE

War dôn: *Ma Rudono chiri*; pe war dôn: *Ann Normandi*.

Pa deue ann heol pal da guzan,
Wit rei ar sklerder d'ar stered,

Pa deue zunwes da finissan,
Wit rei repos d'ar Vretoned,
Neuze gwejal, goude ma c'hoan,
Me gare ar gouan kaled
Wit kad eur plasik en korn ann tan,
N'e zi, dandost d'am dous mua kared.

Eno welen, em diskrision,
Ann objet p'hini idolen,
Ag e ne fressen war ma c'halon
Fidelamant 'vel e c'heren ;
Mes allaz ! fin zo da gement-se,
Ann amzer-ze zo tremened :
Kouskoude, bete fin ma bue,
Hi vo bepred ma dous mua kared.

O ! natur demeurez ann amitie,
Pegen kre 'ta he da vammen
Wit galloud skuill ebarz em ine
Kemen, ewit eur femelen,
Paraj mil leo a dour da Frans,
Ag eur pried, ag a garan,
Zo oll ewidon heb puissan
Da ankoad ma dousik koand Annan.

Allaz ! hon Doue n'euz kommanded
D'imp n'em gared betek on be,
Na neuz ket, ziwaz ! dimp permetet
Tremen assambles on bue,
Ouspen, rigneur eur vamm heb raison
Ag antetet, heb jujamant
N'euz ma dalc'het pell deuz ma c'hanton,
Tost d'Angoulem, war vordik ar Charant.

Eur hant-anter demeurez lewio
E man ma zi deuz e c'hini,
A pemzek prestik a vlawejo
Boe c'he bed forset da dimi ;
Kement-se c'hoaz nefaso james,
Enn kalon ar fidel Erwan,
E idol mignon, e Annaïtes
Zo enn Treguer, er bourg a Berwenan.
N'a dremen noz n'a meuz eunn unvre
P'hini e freska em spered ;

Morfe, dre e divinite,
Em zransport d'he zi d'he gweled;
Mes allaz ! pa gol ann Dianes
Duond enn er e liou arc'hant,
Hon strinktied pell deuz ma Annaïtes
Barz en eur mor a nec'h ag a dourmant.

Hi vo bepred ma Eloisa,
Ma rouanez, ma idol pur,
Me na deufen james da skuisan
O riman dei kanaouenno fur,
Ewid diski dar Vretoned
Hon fidel vel eunn Abelar,
Ma kanoïnj epp amzer da doned
Melodi dei, gloar d'ann nini e c'har.

MA FIDELITE D'AM MESTREZ

GOUDE E BEZ

War ann tòn gallek : *Adieu mon beau navire, etc.*

Neuz mui widon n'heb boner
Kruel fatalite :
Ma c'hroaz zo rustr a pouner,
Ma idol zo n'he be,
Ma goad a deu da frima,
Ma c'houraj a vank din.
Ma Muz em fors da rimma
Wit klask ma c'honsolin.

Adieu ! eu, eu, eu ; oh, oh, oh, adieu !

Enn gras, tado a mammo,
Pere n'euz bugale,
Ewit choaz o friejo
Lest d'he plen liberte,
Lest libr ebarz n'ho fetrin
Ar flammo dous a pur

Tommed gand helen Divin
Krouer zakr ann natur.

Adieu ! etc.

Ker zo bet d'ar blawejo
Grizoni bleo ma fen,
A da rigneur ann Nanko
Enn e bez e disken
E c'himaj, dous a fidel,
A chom b̄arz em c'halon
Pell braz deuz ma Breiz-Izel,
Heb konsolasion.

Adieu ! etc.

D'aizi hlean ma c'hompas,
Ma lore a ma Muz ;
E douster em inspiras :
Martirez vertuuz,
Ewid e sinserite
We ma rimo kentan,
Ien, astenet n'he be,
Hi ra din c'hoaz kanan.

Adieu ! etc.

Adieu ! ta ma Anaïtes
Da boët deu d'ez sguelan
Ma idol, ma gwir vestrez,
Ma gwir Helloïzan
Resev ann daken daëro
Pinin deo ma bizaj,
Me e offr dez relego,
Pur a sinser homaj.

Adieu ! eu, eu, eu ; oh, oh, oh, adieu !

ADIEU DA BERANGER

War dôn : *Adieu mon beau navire, etc.*

Celtoed, o ma broïs !
Ma mignoned konstant,

Resevet deuz a Baris,
Vel rimo diamant :
Me didi dec'h eur chanson,
Unissomp on lore
A gwelomp oll a galon :
Maro ai Beranger.

Adieu ! eu, eu, eu ; oh, oh oh, Adieu !

Herie, evel muraillou,
Pedeben d'ar Boulevar
Hai alignet ann trou pou
Solid 'vel eur rampar,
Ar bobl a deu da zével
Evel heol ar mor don :
Eur boket pur, imortel
A zo voar peb kalon.

Adieu ! etc.

Ag ar gard imperial
A livre ar pales,
A gondou e rest fatal
Gloar a tristidiges ;
Herie ann artizanet
Diles o labourio,
Ann oll Barizianet
A zo'barz en kaonvou.

Adieu ! etc.

Roul ta konwa somtius,
Glorius a pinvik,
Kondou e rest presius
(A goste politik)
Ha de dachen diwean
Suprem poës e lore ;
Ni kriomp bete morgan :
Oh ! gloar da Beranger !

Adieu ! etc.

Adieu, gwir stur ar raizon,
Flameos a liberte ;
Adieu, baum dous ar galon,
Mizilour ann ine,

Da vue hir a poagnus
Marwel reke tremen
Mes da rimo presius
Na berisong biken.

Adieu ! etc.

Desped da bab da bron
Da jol de vorallau,
Kolloz, o immans bourdon !
Te dreuze muraillo
Kar da Vuz karanteus
A drone n'ez kichen
Ag e helen presius
A nije d'omp helen.

Adieu ! etc.

Te wrewe 'n ipokrisi,
Te falc'h ar fanatik
Ho sevel ar mask impi
Deuz eur falz politik ;
O ! Doue, Tad Eternel,
Resev omp just idol,
Freuz da volante zantel
A da wir abostol.

Adieu ! eu, eu, eu ; oh, oh, oh, Adieu !

ZALUD DA VREIZ-IZEL

War dòn : *Bagnère-Bigore.*

Me a wel tud ma bro,
Tostad ran d'am hontrez ;
Pell deuz a amzer zo
E kuiteis ann ez
D'ober ma zour da Frans,
Da kutul talancho,
Da drehin n'ignorans,
Ann Amour, e bompo.

DISKAN : O ! pegen ge,
Pegen dous e d'am c'halon
Gweled c'hoaz ma c'hontre,
Ma just idol gwirion,
Ma broïis adoret
Deut e c'homez c'hoaz d'ho kwelet
O ! ia, da ma mamm fidel,
Ari he o puguel (1).

Me a wel ann iliz,
Lec'h ma hon badeet :
Benez d'ho sakrifis ;
Jezuz beed meulet,
Tad ar madelezo
Meulomp oll o c'hano
Kerent a mignonet,
Deut hon c'hoaz d'ho kwelet. DISKAN.

Ag eunn tam pelloc'h c'hoaz
Me voel, bete n'envo
Ar mor kre, ar mor glaz,
Ar Manj leun a gullio ;
Me wel ann torancho,
Me wel ar guerek kri,
Me a glëo ar goacho
Houetus war ar bili. DISKAN.

Zalud lec'h ma havouël,
Ti ma mamm a welan,
Ari eo e bugel
Joaüs 'vel fleurio n' han :
Apolon zo charmant
Em ali da riman,
Ar Muz dous a koant
Em ali da ganan. DISKAN.

Pebez joa d'eur Breton
Gwelet c'hoaz e glochet,
Prisbitor e berson
Ag e vuan karet,
Krapal n'he wele kloz
Diwar e vank tossel,

(1) Goëlet ann diskan diwean, na finis ket memez tra

A kemer e repos
War e c'holhedat pel.

DISKAN DIWEAN.

O ! pegen ge,
Pegen dous he d'am c'halon
Gweled c'hoaz ma c'hontre,
Ma just idol gwirion,
Ma brois adoret
Deut e c'home c'hoaz d'ho koelet,
O ! ia gloar d'ann Eternel,
Zalud d'am mamm fidel.

KANTIK AR ZALUD

KINIGET

D'ann Itron Intanvez Ar Goffic,
deuz Lannhuon.

War don : *Oh ! quel bonheur, Jésus est dans mon âme.*

N'eum brosternomp d'ann douar
Gand gwir devosion,
Barz enn presans on Zalvoar,
Jezuz-Krist war e dron,
D'en karina d'en meulin
Lekeomp on boneur,
A wit dont d'he adorin
Kanomp oll gand ferveur :

DISKAN.

Boneur gwirion ! boneur gwirion !
E man Jezuz em ine,
Boneur gwirion, Jezuz zo em c'halon !
O ! Doue ken generus
Enn n'obstant d'hon fec'het,
E voad zakr a presius
Widomp oll n'euz skuillet,
C'hoaz ouspenn er zakramant
Chom ganimp noz a de,

Nobstant e c'homp ken mechant,
Wit boneur omp ine. DISKAN.

Pa oc'h ken mad n'hon c'hever
Jezuz, bugel Mari,
Oan divin dous a tener,
On Doue, hon Messi
Akordet dimp Fransijen
Ar peuc'h al liberte,
A biniget on lezen
Ma vo dign a Doue. DISKAN.

Permetet c'hoaz, Mab Doue
O pidin a galon
Da skuil war o pugale
O penediksion :
Zelleting humbl o plegan
O fen dirag o tron,
N'eur ganen bete morgan
Gand gwir devoision. DISKAN.

Gloar d'ann Tad Eternel,
D'he Vab ann eil Ferson,
Gloar d'ar Spered-Santel
O zri Doue gwirion,
Na sesomp d'ho supplian,
Beteg fin omp deio,
Da doned oll d'omp flasan
Enn pales ann envo.

DISKAN DIWEAN.

Boneur gwirion,
Boneur gwirion,
Er Pales delisius !
Boneur gwirion,
Boneur gwirion,
O ! en Pales ann Tron !

Y.-M. THOMAS,

de Cantez.

(Tous droits réservés.)

